

KANTIK AN OTRO ZANT ROK

War don : *Sant Joseph pe eun all.*

Diskan : Otro zant Rok vinniget,
Klevet hon fedenno,
Ha deuz hon bro pelleet
Pec'hed ha klenvejo.

Pedet Doue da gentan
Ma torro d'ar pec'hed,
Rak ar pec'hed pervuan
A denn war-n-omp klenved.

Ar vag a goll he sturier
Hepdale 'zo kollet,
Ha mar ne douj d'e Grouer
An den a zo gwasket.

Ar mor en deuz e gerrek,
Doue 'neuz taer gwalen,
Hag ar pec'hed zo kiriek
Mar teuont war an den.

Allaz ! allaz ! war ar vro
Ar pec'hed 'neuz tennet
Taer gwalen meurbed garo,
D'an holl dud da welet.

Nag a c'hoad 'zo bet skuillet
Aboue ugent vla zo ;
Nag a dud zo bet lac'het
En-kreiz ar brezelio !

Kaer 'zo labourat bemde,
Ne glever 'met klemmo :
Dre-holl 'man ar baourente
O tiezi ar vro.

War eun dro gand ar brezel
Ha gand ar baourente,
Ni 'wel ar vrec'h o sevel
Hag o skei didrue.

Evit ar pec'her kollet
Gant berr-joaio ar bed,
Goulennet, sant binniget,
Gwir glac'har d'e bec'hed.

A-rok kouitât ar bed-man,
E lere d'ac'h ho tad
Kad true deuz an dud klan
Hag an dud emzivad.

Ha dre-holl c'houi direde
War-dro da bep klanvour...

Deut c'hoaz, deut en han' Doue,
Diredet d'hon zikour !

Gwech-all war an dud klanved
C'houi a re zin ar groaz,
Ha kenkent veent gwelet
Ken seder ha biskoaz.

Enep da glenved staguz
Ha da boanio kalon,
N'euz ket 'vel hano Jezuz
Ha 'vel e basion.

Evel zant Rok vinniget,
Leromp hano Jezuz,
Hag en-kreiz poan ha klenved
Ni 'vo c'hoaz evuruz.

Pa oac'h en par ar maro,
E laraz d'ac'h eun El
Goul gant Doue, hon Otro,
Eur mennad 'rok mervel.

Eur mennad hoc'h euz goulet,
Eur mennad kaer meurbed,
Evit gallout hon miret
Enep da bep klenved.

Laret hoc'h euz 'n ho peden,
Laret 'ch euz da Doue :
« Diwallet deuz ar vosen
« Nep 'no zonz diou-in-me ;

« Diwallet a bep klenved,
« O Doue truezuz,
« An nep en do ho pedet
« En han 'ho Map Jezuz ! »

Hag aboue e tireder
D'ho kad enep klenved,
Ha dre-holl e leverer :
« Sant Rok 'neuz ma c'hlevet ! »

LAOUENANIG ZANT ERWAN.

An hini gano ar c'hantik-man gant devosion, e roomp
d'ean, a greiz-kalon, da c'honid daou-ugent devez
induljanso.

Sant-Brieg, an 21 a viz Here, 1897.

EUGÈNE-MARI,

Eskop Zant-Brieg ha Landreger.